

► Plouyann Gwechall

Ar Marichal Foch (1851-1929), ha zo bet savet ur monumant dezhañ war blasenn ar bourk, a zeue en hañv d'e vaner Trofeunteunioù. Ur gomunite leanezed zo o chom ennañ bremañ.

Ur maner all, maner Kêr ar Rous, a voe savet war vord Rivier Vontroulez e diwezh an XVIIIvet kantved. Ul lec'h kaer meurbed eo gant ur park bras. Distroet eo bet ar rivier e traoñ ar maner evit aesaat mont-ha-dont ar bagoù, rak unan eus birvidikañ pezhier Breizh ez oa Montroulez da neuze.

Er pennad-skriz diaraok e lavared ez oa Plouyann ur barrez Vrezhoneg. E weled a reer splann pa seller ouzh an anoioù-lec'h : Koad Serc'hoù diwar ar ger kozh serc'h, Nec'hoad diwar cnoch > cnech > krec'h / nec'h ha koad, ar Veuzid diwar beuz, Koad Kongar, Penn ar Ru diwar runt > run ha Trofeunteunioù diwar tnou > trow / traoñ, ha Kêr Ar Rous pa ne ve ken.

N'eo ket istor Blouyann manerioù ha labour-douar nemetken avat. A-raok ar Brezel Bras dija ez oa troet Montrouleziz war ar c'hirri-nij. E 1911 e voe dalc'het fest kentañ ar c'hirri-nij war ul lodenn eus tachenn ar c'hoursioù kezeg. E-pad un nebeud bloavezhioù e voe implijet al lec'h-se c'hoazh.

E 1931 e voe graet ar studiadennoù kentañ evit kaout ur gwir dachenn evit ar c'hirri-nij. Choazet e voe ul lec'h plaen etre maner Trofeunteunioù hag hent Lannuon. Etre 1933 ha 1936 e voe graet al labourioù hag e 1939 e voe digoret an dachenn war an ton bras.

E 1940, p'edo an Alamanted er vro, e voe implijet ha kresket ganto.

Aerborzh Montroulez eo deuet al lec'h da vezañ da vat bremañ gant ar gompagnunezh Brit Air ha tachenn ar servijoù.

E 1954 e voe staget Plouyann ouzh Montroulez. Daoust da se e vez graet aliès 'an Aotroù Maer' eus an eil-maer evit Plouyann pe 'an Itron Vaerez' pa'z eo ur vaouez ha zo bet lakaet bremañ da eil-maerez.

► Ploujean autrefois

Le Maréchal Foch (1851-1929), à qui on érigea un monument sur la place du bourg, venait l'été à son manoir de Trofeunteunioù. Celui-ci est occupé maintenant par une communauté de religieuses.

Un autre manoir, le manoir de Keranrous, fut construit au bord de la rivière de Morlaix à la fin du XVIIIe siècle. C'est un lieu magnifique avec un grand parc. Le cours de la rivière, au fond du manoir, a été modifié pour faciliter le passage des bateaux, car autrefois Morlaix était l'un des ports les plus animés de Bretagne.

Comme nous l'indiquions dans l'article précédant, Ploujean était une commune bretonnante. Ce fait est flagrant lorsque l'on en étudie les toponymes: Koad Serc'hoù (Le Bois des Amoureuses), Nec'hoad (Le Haut du Bois), ar Veuzid (La Boissière), Koad Kongar (Le Bois de Congar), Penn ar Ru (Le Bout de la Butte), et Trofeunteunioù (Le Val des Fontaines), Keranrous (Le Village de Le Roux). . .

Cependant l'histoire de Ploujean ne se résume pas aux manoirs et à l'agriculture. Déjà avant la Grande Guerre, les Morlaisiens s'intéressaient aux avions. La première fête de l'aviation se tint en 1911 sur une partie de l'hippodrome. Cet emplacement fut utilisé pendant plusieurs années encore.

Les premières études pour un vrai terrain d'aviation furent faites en 1931. Un terrain plat, entre le manoir de Trofeunteunioù et la route de Lannion, fut retenu. Après les travaux de réalisation qui eurent lieu entre 1933 et 1936, on procéda à son inauguration en grande pompe en 1939.

En 1940, le terrain a été utilisé et agrandi par les Allemands.

Le lieu est devenu maintenant l'aéroport de Morlaix avec la compagnie Brit Air et la zone de services.

En 1954 Ploujean fut rattachée à Morlaix. Toutefois, bien souvent encore, le maire-adjoint de Ploujean est appelé 'Monsieur le Maire' ou 'Madame le Maire', puisque c'est une femme qui occupe la fonction maintenant.